

GWERZ

an den evuruz

Charlez Blez

—: 1320 - 1364 :—



SAINT-BRIEUC

Imprimerie St Guillaume, boul. Charner

1913

GWERZ AN DEN EVURUZ CHARLEZ BLEZ

1320-1364

DISKAN war don : *Stourm an Tregont*,
KAN war don : *Ar re unanel*.

DISKAN

O den evuruz Charlez Blez
Miret ar Fé stard en hon zouez
Evit geuilh ho skouerio Kristen,
Hag en Env n'em gât n'ho kichen.

I

Er bla trizek kant ugent, Charlez Blez a c'hanas
En Ker Bloa, eus a gerent pinvik ha brudet bras ;
E dad oa Gui Chatillon, eus ar gaëran noblanz,
Mac'harit valoa, é vam, oa c'hoar da roue Franz.

II

Kristen ha fur é gerent, zantel é gelenner,
Charlez a dolas abred, vel eur vleuen dener,
C'houez vad an holl vertio, dreist-oll diou en o
[zouez,
Karanté 'Kenver Doue, ha 'Kenver ar paour-kez.

2

III

En iliz en em blijè; serviji ré ar paour;
Eus e zilhad, ré déan, pa n'ije ken a aour.
Eun dé, kât gantan eun dal, e lavaras déan:
« Diskwé da géfier ma zad ar pez did a roan ! »

IV

Unan eus he vanego d'an dall nevoa roet;
Met rok rei ar vanegen, he-man he doa stoket
Eus malven e zaoulagad a welas sklaër raktal!
Aboë dek vla koulskoude, ar paour-kez a oa dal!

V

Dimét da Janed Pentiév, Charlez a reuk abred
Dibun kuden gwall luriet, tanva trubuill ar bed!
Evit heuill al lealded, difen gwir é bried,
Betek é varo, breman, en brézel vo bepred!

VI

Pad pewar bla war'n'ugent, ec'hevo douar Breiz
Gwad marc'herien kalonek, ha zoudarded a leiz;
Kalon Charlez vo rannet, mez eur vouez en é greiz
Na damallo ket néan da véan bet direiz.

VII

Tremen pemzek kant emgann, war dro eiz kant
Welo, siouaz, krog-ha-krog, ar Zôzon, ar Vreiziz!
[séiz]

- 3 -

Gant zoudarded eus Bro-C'hall, Charlez nevo zikour.
Monfort glaskô ar Zôzon eneb é enebour.

VIII

Ar Vreiziz, a rum-da-rum, o deus miret envor
Eus ar brezel-ze bet gret dre bevar c'horn Arvor,
Dreist-oll eus emgann ar Roc'h, stourm an Trégont
[goude
Ha d'ar fin, maro Charlez, c'hoarvéet en Alré.

IX

Landreger ha Lanhuon gant ar Iôzon Zapet,
E vané c'hoas ker ar Roc'h, 'du gant Charlez chomet,
Er bla seiz ha daou ugent goude n'drizek kanvet,
Ar Zôzon, é miz Even, er Roc'h zo diskennet

X

Charlez rannet he galon, na fellé ket déan
Lézel pelloc'h ar ger-ze gant ar Zôz da waskan,
Zoutennet gant tud ar vro eteu kentan m'hall dont
Da zével eus ker ar Roc'h ar Zôzon divergont.

XI

Deut oa a-ben, vit laret, da gas anê emaëz,
Pa digouéas Zôzon-all aruet eus Karaëz;
Neuze tapet tré daou rum, Charlez vel eur léon,
Var vek dosen Bucello a sko war ar Zôzon.

XII

Mez, siouas ! Kouéan a ra'ne gorf seitek gouli,
E oad o tivéran puilh eus é holl izili !
Nan houllas ket koulskoude rei nemet d'eur Breton
Ar c'hleve^o a c'hoas n'e zorn, ruiet gant goad Zozon.

XIII

Eun ine mad dindan-han, lak eur c'hol' c'heded plu,
Mer maest he enebourien 'ra hen zavel dustu !
War eun tam plouz eo laket, ha c'hoas en em glem
[ket,
War ar plouz, a c'houdevez, e ra lê da gousket.

XIV

Ar Roc'h na chomas ket pell tré daouarn ar Zôzon,
Gant zoudarded roue Franz, teuas d'he maest
[guirion.
Charlez lakas da rên nezi an den brudet Guesclen,
Ha meur a wech e teuas da chom en e guichen.

XV

Eun dé Kreiz ar gouañv bras, Charlez guitaas ker,
Evit Kerset diere'hen, étrézeg Landreger :
Dre ar skorn ha dre an ec'h, didamant eus e boan,
An den zantel en em rent dirak bé Zant Ervoan.

XVI

Ous hen guellet, an dud kez, ouél dourek war he
[lec'h
Darn, zo-ken, a dol dilhad, darn-all plouz war an
[ec'h.
Aru en ker Landreger, Charlez n'all ken kerset,
Diwar planto he zaou droad, ar c'hroc'hen zo
[kouéet.

XVII

En peb kouls eus he vuez, e ra hir bedenno ;
'N'em blijout 'ra o klevet kals a oferenno,
Digemer ra aliez Zacramant an Oter,
Ha dalc'hmad, en peb maré, e vo leun a zousder.

XVIII

Diou vech, ha hir vlavezio, prizonier en Bro-Zoz ;
Elec'h klemmo e teüo eus e c'heno bennoz,
Bennoz da Roue an Env ! e c'hiz a oa laret,
« Ra vo dreist peb tra, Doue, meulet ha binniget ! »

XIX

Yost ha skwiz o vrezelli, klanv zoken 'ben neuze
E ra ar c'hrog diwéan damdost da ger Alré.
Siouaz, eno Charlez Blez 'zo gwellet o kouéan
'N 'eur laret : « Ah ! ma Doue ! » e c'hirio diwean !

XX

Mignoned, enebourien a zo oll glac'haret.
E gorf a deu da Wengamp 'vit béan douaret.
Enon c'hoarvé burzudo, merko a zantelez,
A lak ober eun emklask war holl bué Charlez.

XXI

Epad tremen pemp kant vla, Charlez zo bet chomet
Hep béan gant an Ilis, den evruz diskleriet.
Er bla naontek kant pévar, Pi dek, hon Tad zantel,
A imbannas ar c'helo, res tridal Breiz-Izel !

XXII

Ker Gwengamp 'vit saludi war e dron lugernuz
Charlez Blez névé laket 'tousez an dud evuruz
A réas gouelio dispar, lec'h oa boudet, a-leiz,
Kristenien eus a bep bro, dreist-oll bugale Breiz.

~~~~~  
**PEDEN**

Doue hag ho peus roet d'ho Kovezour zantel,  
Gwechal pried ha tad fur, hirie gloar Breiz-Izel,  
An nerz da chom stag ousoc'h, er joa kouls hag  
[er boan,  
Roet dimb, dre e skoazel, nerz da drec'hi Satan.  
Ha pan eo gwir 'neus bevet er ger man a gare,  
Ni n'em blijo o laret ar beden a lare :

« Ra vo Doue dreist peb tra meulet ha binniget ! »  
Meulet pa vo levez, pa 'vo poanio kolet !

Zikouret gant ar Wec'hez ha gant hon Fatronez  
Bihan ha braz a heuilfomb skouerio mad Charlez  
[Blez,  
Evit gallout holl, eun de, achu hon reuz aman,  
N'em voudan er Barados 'en dro d'e ha dézan !

**Y.-M. GOASDOUÉ.**  
*person. Coadout.*

NIHIL OBSTAT

*Brioci, die 27<sup>a</sup> aprilis 1913*

**J.-B. CARLUER**  
*Can. tit cens.*

Imprimatur

*Brioci, die 28<sup>a</sup> aprilis 1913*

**Y.-M. LE PENNEC**  
*vic. gen.*

